

EUR C'HRISTEN KALOUNEK

o tifenn ar Groaz.

TON : *Ma c'halon a zo fraillet.*

Pa ioa tostik da vervel ar c'hanved diveza,
P'en doa an dispac'h euzuz chenchet penn da bep tra,
Diou vro dreist-holl a choumas bepred stard en ho feiz :
Ar Vande a zo unan, hag eben eo hor Breiz.

Gwall-grogadou a vije du-ma du-hont bemde
Etre arme an dizurz ha paotred ar Vande ;
Ar baotred-man nebeudik e-skoaz re an tu-all
A skoe, ken a zaone, gwasoc'h eget tud dall.

Eun droad ioa koulz goude var an dachenn, siouaz !
Kouezet meur a Vandean 'tre daouarn *ar re c'hlaz* ;
Unan, eun den kalounek (Ripoche e ioa hanvet),
Eo gand he enebourien e-harz eur groaz stlejet.

« Trubard daonet, emezint, te a virit raktal,
« Te a virit 've great, el leac'h man, did da stal.
« Koulz goude sell ! mar karez, te 'chencho planedenn ;
« Mar karez, te a velo adarre da lochenn. »

« Petra 'm euz 'ta, emezhan, petra 'm euz da ober
« Evit distrei d'am lochenn ha gwelet va zud ker ? »
« Eun dra n'euz ken da ober : n'e teuz nemet diskar
« Gant eur vouc'hal zo aman ar groaz-se d'an douar. »

Peur-achuet eo gantho a veac'h ho c'homzou fall,
Pa veler ar Vandean o kregi er vouc'hal...
Neuze, 'tousez he vignouned 'velthan prisonerien
Ha bodet holl er c'hroaz-hent e sav eur griadenn.

Ho mignoun, a gav dezho, en deuz nac'het he feiz !
Hag e lamm gand ar gounnar ho c'haloun en ho c'hreiz !
Mes, a drugare Doue, deski reont hep-dale
Ripoche ne raio biken dismegans d'ar Vande.

Kerkent ha ma eo savet tre bete troad ar groaz,
Gant eur vouez skiltr ha dispount e lavar d'*ar re c'hlaz* :
« Ma ve ar groaz-man taget, me 'zo prest d'he difenn ;
« Neb a zaillo varnezhi a vo faoutet he benn ! »

Da galoun he vignoured o na dousa komzou !
Ar meneziou a dregern gant ho iouc'hadennou.
Mes, avad, pebeuz kounnar e kaloun *ar re c'hlaz* !
Pec'hi reont evel diaoulou ha iudal evel chas.

Ar gounnar a ra dezho en em glevet buhan :
Setu dispak ho armou... ha Ripoch ne ra van !
Tan a zo en he lagad... Ar vouc'hal a lugern...
« Tostait breman, emezhan, tostait, boed ann ifern ! »

D'ar re genta 'dosteaz e oe rannet ho fenn :
Unan, daou, tri ha pevar, ha kalz re-all ouspenn.
Bouc'hal Ripoch a skoe, hag a skoe dalc'hmad ;
En-dro d'ar groaz a bep tu e ruille puill ar goad.

Stank braz e ioa he daoliou ; ar vouc'hal gwall-bounner
E oe ganthi he vreac'h morzet e berr amzer ;
Ha, pa vel ar zoudardet ez eo breman dinoaz,
E lavaront adarre : « Diskar, diskar ar groaz ! »

« Nan, nan ! biken, emezhan, eur seurt torfed na rin,
« Kant gweich ha mil gweich mervel a zo gwelloc'h gan-in.
« Aman, o kroaz venniget, e harz ho treid santel,
« Evit Jezuz va Zalver, me zo prest da vervel. »

Raktal eur zoudard ifam, didruez a blantaz
He gleze, 'treuz ar galoun, da zifenner ar groaz :
Ha goude, da beur-ober al labour milliget,
E oe, a-daoliou bouc'hal, ar groaz sakr diskaret.

D'an noz var-lerc'h e teuz kristenien ar c'harter,
Da zebelia gant respet relegou ar merzer ;
En douar oe diskennet, leac'h ma ioa bet skoet ;
Gant tammou ar groaz santel he vez oe goloet.

Enor, ha mil meuleudi d'ar c'hristen kalounek
A stourmaz bete mervel enep eun urz diaoulek ;
Ma vije stankoc'h breman hevelep kristenien,
E ve da baotred Satan gwasoc'h an abadenn.

Kalz enebourien d'ar groaz a gaver e Bro-C'hall,
Mes ne ve ket peurvuia en ho dourn eur vouc'hal ;
Gwasoc'h benvek zo gantho, siouaz ! en hon amzer ;
D'ar groaz sakr e reont brezel gant ar skol dibater.

Kristenien vad Breiz-Izel, o dalc'hit sounn ho penn ;
N'ho pet aoun na rak Satan, na rak he vevelien.
C'hoant o deuz gant ho skoliou da laza ar gwir feiz ;
Ra zavo skoliou kristen e pevar c'horn hor Breiz !